

HC_0008_Kanaouenn an Uhelgoad

Selouit holl ha selouit
ur son zo nevez kompozet

Graet gant kanerien Roch' ar Grein
a gane dec'h ken a vrall ar maen

ha kanerez war vord al lein
lako amann war ar grampouenn

Tro war dro d'an Uhelgoad
zo kalz a reier ha kalz a goad

Menaj ar Werc'hez kreiz ar vourc'h
Ha ti an diaoul a zo pelloc'h

Na tro war dro da Gamp Artuz
zo kalz a goad ha kalz a lus

Gwenojenn an amourousted
da gas ac'hanoc'h da welet ane(zh)i

Bord an hent bras zo un toull bras
diwallit mat da gouezhañ er foñs

Diwallit mat da gouezhañ er foñs
kar zon an diaouled an hanternoz

an hanter noz pa vez sonet
an diaouled bras zo dihunet

Chomomp eta war an hent bras
ha ni ay tout d'an Uhelgoad

En Uhelgoad p'oamp erruet
ur chopinad avomp tapet